

Truez, Gwerc'hez Vari!

8N3-5-007

Kantik ar Brezel

To. : Santez Mari Mamm Doue.
n° 55.

Gwerc'hez Vari, daoulinet holl dirak ho skeuden,

Ni ho ped da rei skoazel d'hor bro ger en anken:

Eur peoc'h gwirion goulennit digant Doue d'ezhi...

He stad a zo gwall boanius: truez, Gwerc'hez Vari!

Gwerc'hez zantel, Rouanez an Nenv hag an douar,

Gwellet hor Breiz 'zo beuzet e'r c'haonv hag e'r c'hlae'har, —

Bro-Frans, Merc'h hena 'n Piz, a zo braz he enkreiz.

Piou 'zeui 'ta d'ho frealzi nemed Hec'h-C'hwil, Gwerc'hez?

Ia, Mam ger, evit difen ho bro meur-bed karet,

Gant ar brasa nerz-kalon, hor gwazed 'deuz redet.

'Vit Bro-C'hall ha Breiz-Izel prest da rei ho buhez...

Mez trec'het int bet!.. O Mam!.. Out ho bezit truez!

Rak, Mam, e-kreiz ar stourmad eur maread 'zo maro:

Ma 'z aint buhan d'an Nenvou, oh! pedit evit-ho.

Pedit c'hoaz 'vit ar gwragez, mammoù ha minorez

O denz kollët e 'r brezel ho zad, mab pe bried.

Ouz-pen, Mam, eun niver braz 'zo du-hont e'n harlu,

Pell-pell diouz holl ho c'herent, — oh! na pella repu.

Pe-goulz 'ta, Mam a druéz, e c'hello 'n dud keiz-ze

Dizrei da vro ho c'havel, iac'h a gorf hag ene?..

Oh! gloar d'an Drinded Zantel, tri Ferson e Doue.

Ha gloar d'ar Werc'hez Vari, Mam, Jesus hor Roue!

Ra zeui 'an holl d'ho c'hared, ha dre-holl ha demde,

Ma 'z aimp 'kevred d'ho meuli d'ar Baradoz goude!